

## D'an 31 a viz Mae

- **Gouel Gweladenn ar Werc'hez Vari**, o kounaat an deiz ma'z eas da gaout Elizabed he c'heniterv hag hi o tougen ur mab en he c'hozhni. Da-geñver emgav an div vaouez, e santelaas an Dasprener e ziaraoger hag int o daou e korf o mammoù. Da gevarc'hadenn Elizabed e respontas Mari dindan lusk ar Spered Santel gant he Magnificat o kanmeuliñ trugarez an Arloz.<sup>1</sup>

- Er I<sup>añ</sup> kantved, e Roma, merzherenti **santez Petronilh pe Perounell** (Gl Pétronille pe Perrine), gwerc'hez.

Diazezet e voe he c'hehelerezh gant ar pab Leon I<sup>añ</sup> hag e veze sellet evel merc'h sant Pêr tra ma'z eo kentoc'h eus tiegezh Flavia Domitilla, dre dTitus Flavianus Petronius, ha badezet evelkent gant Penn an Ebestel.

- E 740, e Bro-Saoz, **sant Aelwez**, abad hag eskob Lindisfarn.

Hag eñ keneil sant Kutberzh, e voe priol ha da c'houde abad Melroz kozh e Bro-Skos, a-raok bezañ diuzet da abad-eskob Lindisfarn.

- Er VI<sup>vet</sup> kantved, **ar sent Gwennou, Mank ha Merbad**, Iwerzhoniz, abostolourion ar feiz en Devnon (Kernev-Veur).

- En Iwerzhon, **sant Maeloran**, manac'h.

- En Iwerzhon, **sant Even** (en Iwerzhoneg : Eoghan), eskob.

## D'ar 1<sup>añ</sup> a viz Mezheven

- War-dro 165, e Roma, merzherenti **sant Justin**, prederour ha kantreizher.

Genidik eus Samaria e Bro-bPalestina, en em lakaas da glask ar wirionez e meur a skol brederou-riezh kent dizoleiñ gant ar gelennadurezh kristen "*ar furnezh nemeti, emezañ, a vije asur ha gwirion.*" E ouiziegezh a lakaas e gwazerezh Iliz Roma hag e skrivas meur a oberenn, en o zouez ur skrid-difenn enneget d'an impalaer, e-lec'h ma tispleg kevrinenn ar vadeziant ha kevrinenn an Aoter. Da vare Marcus Aurelius e voe kaset dirak ar prefed Rusticus ha barnet d'ar marv. Andishet e voe war un dro gant e ziskibled **ar sent Cariton ha Caritas, Evelpist ha Hieron, Pacon ha Liberian**, a resevas int ivez kurunenn glodus ar verzherion.

- Er IV<sup>re</sup> kantved, **sant Jovinus (Gl Jouin)**, penitiour, breur sant Maksimin Trier.

Yaouank flamm e oa c'hoazh p'en em dennas en Ension, e-kichen Loudun, lec'h ma teuas diskibled ha ma savas evito ur manati a zeuas da vezañ Saint-Jouin-de-Marnes.

- E 849, e Leicester e Bro-Saoz, merzherenti **sant Wistan**.

Hag eñ roue yaouank Mersia, e enebas ouzh dimeziñ e vamm rejantez a gave gwadserc'hek hag e voe lazhet dre un taol kleze gant an emvenner.

- **Kounidigezh ar Werc'hez Vari, Hanterourez an holl radoù**, lidet gwezhall en eskobiezh Roazhon.

---

<sup>1</sup> Lidet e voe kerkent hag an XIII<sup>vet</sup> kantved hag a voe ensavet gant ar pab Urban VI e 1389. Lidet a-raok 1969 d'an 2 a viz Gouere, eo bet lakaet da vare Paol VI e dibenn Miz Mari goude gouel ar C'hemenn hag a-raok gouel Ginivelezh sant Yann Vadezour.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> kantved, **sant Ronan**, eskob, Iwerzhonad, penitiour e Lokronan-Kernev ha Lokronan-Leon, marvet en Hilion e Bro-Sant-Brieg.

Genidik eus Iwerzhon e vije bet eskobet gant sant Padrig kent kuitaat e vro moarvat evit ur *Peregrinatio Pro amore Dei* diouzh ar c'hiz iwerzhonat. Dilestrañ a reas e Molenez. E vuhez penitiour a grogas e Lokronan-Leon. Dre ma teuas buan kalz a dud davetañ ez eas d'en em staliañ e Kernev, e Koad Neved, bremañ Lokronan-Kernev e-lec'h ma vez graet an droveni vrudet war e roudoù. Eno en devoe da c'houzañv a-berzh ur vaouez anvet Kebenn a zalc'he d'ar c'hredennoù pagan. Echuiñ a reas e vuhez en Hilion e Bro-Sant-Brieg.

- E 1147, **ar wenvidigez Ermengar pe Ermengard**, dugez Breizh, pried Alan IV "Fergann" dug Breizh, mignonez sant Bernez, marvet en abati Redon.

Ober a reas war-dro melestradurezh an dugelezh e-kerzh ar groaziadeg gentañ ma kemeras an dug perzh enni. E darempred speredel don gant sant Bernez e tegasas he skoazell evit diazezañ abatioù kisterkiat er vro : Bear, ar Releg, Langoned, Boken, Buze... Aet da birc'hirinañ d'an Douar Santel e lakaas da sevel un iliz war buñz Yakob e-lec'h ma kejas Jezuz gant ar Samariadez.

- En Iwerzhon, e 717, **sant Cronan Ua Eoain** - eleze *Douaren Yann* - abad Lios Mór .

- E Breizh, e 1888, distro da Zoue ene **breur Florian-Mari, Yann-Bêr ar Boterff** eus e anv badeziant. Ar Werc'hez he doa en em ziskouezet dezhañ e Noal-Muzilheg e barrez c'henidik o c'houlenn ez afe da birc'hirinañ war e dreid noaz betek Santez-Anna Gwened o pediñ « *evit Breizh.* » Da c'houde ez eas e-touez breudeur Lamennis hag e varvas e Ploermael.

## D'an 2<sup>ed</sup> a viz Mezheven

- War-dro 304, e Roma, da vare Diocletianus, merzherenti **sant Marsellin**, beleg, **ha sant Pêr**, ec'holier, meneget o daou er C'hanon Roman.

Hervez ar pab sant Damaz e voent kaset da lec'h o boureviadur a-dreuz an drein ha rediet da gleuzañ o beziou gant o daouarn, pezh a rejont douget gant levezeg dreistnaturel.

- E 177, merzherenti **sant Potin**, eskob Lugdunon (Lyon), ha **santez Blandina**, gwerc'hez, a-gevret gant o 46 keneil, merzherion gentañ Gاليا. O tont eus Smirna en Asia-Vihanañ e oa Potin diskibl sant Polikarb hag en doa anavezet an abostol sant Yann.

An eskob kozh a varvas a faezhidigezh en toull-bac'h. Blandina "*gwan ha bihan*" he devoa "*gwisket ar C'hrist*" ; antren a reas er gelc'hennva "*leun a joa hag a levezeg evel pa vije bet pedet d'ur banvez-eured.*"

- E 657, e Roma, **sant Eugenius I<sup>añ</sup>**, pab, diuzet e 654, goude merzherenti e ziagentour sant Varzhin I<sup>añ</sup>. Stourm a reas a-enep disivoud an unvenntez a nac'he ar venntez denel er C'hrist.

- E Breizh e 180, **sant Yust pe Yuz**, merzher kentañ an Arvorig. Eskob Viena e oa kent dont da Roazhon lec'h ma voe merzheriet.

- E 670, e Terascia (Thiérache), **sant Aelgeis**, beleg penitiour, Iwezhonad, keneil sant Gobein, ar sent Boethian (Gl Boetien) hag Albev (Gl. Albeu), diskibled sant Fursa. Bevañ a reas e Terascia hag e avieljont bro Arras ha Laon.

- E Sant-Brieg : **Itron Varia ar Goubeizh** kehelet en he brientiliz savet war dorgenn Sant-Pêr nepell diouzh an iliz-veur. (*Lidet bremañ d'an 8 a viz Mae e Sant-Brieg*).

### D'an 3 a viz Mezheven

- E 273, e Nikomedia, merzherenti **santez Paola**, a-gevret gant **sant Lukillian** hag ar vugale **ar sent Klaoda, Hipatios, Paol ha Denez**.

Hag int harzet ha barnet d'ar marv abalamour d'o feiz e voent jahinet kriz. Dibennet e voe ar vugale. Kroazstaget e voe Lukillian gant tachoù en e zaoulin hag en e gorf a-bezh. Ha drailhet e voe dremm Paola a-raok he dibennañ.

- E 565, **sant Lifer** (Gm. Leobafar ; Gl. Liphard pe Létard), abad.

Hag eñ kenderv da gKlodwig I<sup>añ</sup> a Vro-C'hall, e oa barner ha gouarnour Orleañs p'en em dennas evit ren ar vuhez a benitiour e Meung lec'h m'en em vodas diskibled tro-dro dezhañ. War-lerc'h e varv e kreskas ar gumuniezh a zeuas da vezañ un abati beneadat, ar venec'h o tisec'hañ ar gwernioù tro-dro hag o tiorren ar gwiniegi. Mesket e vez a wezhioù gant sant Lifarzh, arc'heskob Kêrgent (Canterbury) e Breizh-Veur

- E 1886, en Ouganda, merzherenti **sant Charlez Lwanga hag e 12 keneil**, seizh vloaz hepken goude donedigezh ar visionerion gentañ er vro.

Hag int eus strollad flec'h ar roue Mwangi pe izili eus ar ward, oadet etre pevarzek ha tregont bloaz, e kavjont gwelloc'h chom start en o feiz eget plegañ da c'hoantoù hudur ar roue. Diwar-se e voent dic'houzouget pe daolet en tan. A-gevret ganto e vez graet koun eus nav merzher all lakaet d'ar marv en hevelep abeg etre 1885 ha 1889. Sant Charlez Lawanga a zo bet disklêriet paeron yaouankizoù Afrika.

- E 1963, e Roma, **sant Yann XXIII**, pab.

Hag eñ henaour Venezia, e voe diuzet Angelo Giuseppe Roncalli, d'an 29 Here 1958, hag e c'halvas ar Goursenez Vatikan II e Miz Here 1962. Gwenvidikaet e Gwengolo 2000 e voe santelezh et d'ar 27 a viz Ebrel 2014 war-un-dro gant Yann-Baol II.

- En Iwerzhon, e 618, **sant Kevin pe Kuñvin**, diazeour abati Glean Dá Loch (Glendalough da lavarout eo : Glenn an Div Loc'h) a zo unan eus ar pevar lec'h pirc'hirinañ pennañ Iwerzhon gant Menez-Sant-Padrig (Croagh Patrick), Purgator Sant-Padrig e Lough Derg, hag ar Skellig Michael. Mab ur roue, e voe badezet gant sant Kronan, diskibl sant Petrog.

- E 1607, **an Tad Kasian**, kabusin eus an Naoned, merzheriet e Ronbea en Abisinia (Etiopia).

### D'ar 4 a viz Mezheven

- E 309, da vare an impalaer Galian, merzherenti **sant Kirin**, eskob Sischek en Illiria - hiziv Siscia e Slovenia - lakaet d'ar marv en abeg d'e feiz er C'hrist. Taolet e voe er stêr gant ur maen ouzh e c'houzoug.

- Er IV<sup>re</sup> kantved, distro da Zoue ene **sant Optad**, eskob Mila e Numidia, unan eus gwellañ katreizherion e amzer, savour ur *Pleustrad enep an donatourion*, echuet da vare Teodoz, oc'h erzerc'hañ azonoù an Iliz wirion *hollvedel hag unan*.

- E 545, e Teurng, **santez Klotilda**, rouanez, gwreg Klodwig I<sup>añ</sup>, roue ar Franked.

A-drugarez d'he fedennoù e tegemeras he gwaz ar feiz kristen hag e voe badezet e Reims. Goude marv ar roue, en em dennas e-kichen bez sant Varzhin e Teurng evit ren ur vuhez kuzhet a bedenn.

- E 383, e Kolun, merzherenti **santez Tunvezh**, gwerc'hez, eus bodad kavandadezed santez Ursula, anavezet er Vro-Vigoudenn evel c'hoar sant Eneour.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> kantved, **santez Ninnog pe Gwennouestl**, abadez, diazevourez ar manati kentañ evit manac'hez e Plañvour.

Ganet eo war-dro 403, merc'h ar roue Brec'han ha Menezug, priñsez eus Iwerzhon. Deuet an oad da zimeziñ e voe goulennet gant un tiern eus Bro-Skos a blije d'he zad hogen Ninnog a nac'has dre m'he doa divizet da gaout pried ebet estreget Jezuz-Krist. Graet he soñj en em staliañ en Arvorig e treuzas ar mor e penn ur bagad niverus a gristenion en o zouez daou eskob, beleion, menec'h ha tud lik. Ereg hag a oa e penn ar vro en o aotreas d'en em staliañ war un tamm douar a zeuas da vezañ parrez Plañvour lec'h ma tiazezas ur manati evit he diskiblezed hag en o c'hichen ur manati all evit ar venec'h. Bevañ a reas 32 vloaz en he abati hag e varvas d'ar 4 a viz Mezheven 486 pe abretoc'h e 467.

- Er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Pereg pe Petrog**, abad ha penitiour, "Tad Sant Kernev-Veur", mab Glywys roue Glywysing e Kembre, breur sant Serv ha sant Konlae, savour manati Sant-Pedrek.

Pa varvas e dad e nac'has kemer e lec'h evit mont da vanac'h e Kernev-Veur ha goude-se en Iwerzhon lec'h ma chomas ugent vloaz o studiañ. Distroet da Gernev-Veur gant diskibion e savas manati Lannwedhenek hiziv Padstow. E Kernev-Veur e kejas gant sant Samzun a guitaas ar vro evit mont d'an Arvorig gant diskibled, en o zouez sant Meven. Hervez lod e vije deuet sant Pereg ivez ur pennadig en Arvorig gant sant Meven. Mont a reas Pereg da birc'hirinañ betek Roma ha Jeruzalem hag en dije bevet zoken seizh vloaz war un enezenn en India. Distro da Gernv-Veur en devoe da c'houzañv digant Tendur (Toedor) a oa e penn ar vro. Hemañ a diwezh a roas da bPereg douaroù e Bosvenegh (Bodmin e Saozneg). Pereg, oadet bras, a varvas e manati Lannwedhenek.

- D'an hevelep deiz, diskibled sant Pereg : **sant Degan**, eskob, **sant Kroidan**, **sant Medan**, **sant Izi**, ha **sant Konan**, Kembre, kenlabourer sant Pereg e Kernev-Veur ha sant Kadoù e Kembre, a savas ilizoù e Kernev-Veur.

- En deiz-mañ e c'heller ober ivez **Kounidigezh holl sent Kernev-Veur**, en o zouez ar re n'anavezet deiz gouel ebet dezho evel : **santez Azwenn**, **santez Beg**, **santez Ev**, **santez Kevran**, **santez Krewenn**, **santez Ladog**, **santez Morwezh**, **santez Senar**, **sant Alun**, **sant Brewal**, **sant Briavael**, **sant Devan**, **sant Erne**, **sant Erved**, **sant Ginaz**, **sant Gonwarou**, **sant Gwizhan**, **sant Illogan**, **sant Kavezan**, **sant Kolan**, **sant Liveri**, **sant Maelduv** abad savour Malmesbury, **sant Maonan**, **sant Moe** pe Trevoe, **sant Nent**, **sant Paolin**, **sant Perewen**, **sant Reizh**, **sant Rezal**, **sant Salod**, **sant Senan**, **sant Suleg**, **sant Sulveg**, **sant Tegan**, **sant Yunabou**.

- En Iwerzhon, er V<sup>vet</sup> kantved, **santez Briag pe Breacca**, gwerc'hez, diskiblez santez Berc'hed Cill Dara. Dont a reas da ren ar vuhez a benitiourez e Kernev-Veur hag en em stalias war ribl an Hoyle gant diskiblezed en o zouez santez Krewenn.

- E Breizh, en XIII<sup>vet</sup> kantved, **sant Jugon**, bugul, ganet e Gaziliég, kelennet gant person Sant-Varzhin-an-Oud, marvet da bemzek vloaz. Paeron ar vugulion.

## **D'ar 5 a viz Mezheven**

- War-dro 362, e Thrákê el Liban, merzherenti **sant Dorothea**, eskob.

Hag eñ beleg eus Antiokeia e vije deuet da vezañ eskob Tyr e Fenikia. Treuzvevañ a reas dreist d'an heskinadurioù a ziwasakas da vare Diocletianus hogen e voe lakaet d'ar marv da vare Juluanus erruet d'an oad a 106 bloaz.

- E 754, e Dokkum en Izelvroioù, merzherenti **sant Winfrid a Wessex**, lesanvet **Bonifacius**, arc'heskob Mainz, abostolour Germania ha Friz.

Genedik eus an Devon e Bro-Saoz, e oa Winfrid ur manac'h beneadat. Mont a reas da Roma hag e voe eskobet gant ar pab Gregor II a roas dezhañ an anv Bonifacius hag e gasas da embann ar feiz e Germania. Eno e c'hounezas engroezioù a dud d'ar C'hrist. E sez a ziazezas e Mainz. Edo o avielañ Bro-Friz da heul sant Willibrord pa voe lazhet a daolioù kleze war un dro gant daou gompagnun ha hanter-kant gant paganiz brouezet. Sebeliet e voe en abati Fulda en doa diazezet.

- E 1036, **ar gwenvidig Meinwerk**, eskob en Alamagn.

Kar da santez Emma ha d'an impalaer sant Herri II en anvas eskob Paderborn lec'h ma savas ur skol gador vrudet, ez eo sellet evel "eil diazezeur" ar gêr hag e vez lezanvet an "eskob saver" abalamour d'al labourioù adeiladiñ a renas.

- En Iwerzhon, **sant Niadh** (Noued), abad.

### **D'ar 6 a viz Mezheven**

- E 696, **sant Kloada** (Gl Claude), eskob Besançon, gwarezour ar vugale vihan.

Da gentañ soudard, ez eas Klaoda da vanac'h e Condat e Bro-Arvern a-raok bezañ anvet eskob maorvat e Besançon. Kerkent ha ma c'hellas e tilezas e garg evit mont en digenvez evel penitiour e Saint-Oyan de Joux er Jura. Diskibled a zeuas gantañ betek sevel un abati a voe penn-kentañ ar gêr hag an eskobiezh a gemeras e anv diwezhatoc'h : Saint-Claude.

E 1499, goude he eil dimeziñ gant ar roue Loeiz XII ez eas Anna Vreizh da birc'hirinañ betek eno evit goulenn un hêr goude bezañ kollet he holl vugale gant Charlez VIII. Neuze e c'hanas ur verc'h a anvas Klaoda.

- E 1134, **sant Norberzh**, eskob Magdeburg e Saks, diazezeur Urzh ar Chalonied Reoliek anvet *Premontredi*.

Da gentañ, e voe chaloni e Xanten e Bro-Roen, kent en em dennañ gant un nebeut kompagnuned e Frañs, nes da Laon e Premontrez e 1120. Nebeut goude e voe diuzet da eskob hag e labouras evit adreizhañ an Iliz en Alamagn.

- E Breizh, war-dro 625, **sant Gurwal** (Lt. Wotalus), ganet e Kembre, eskob Aled war-lerc'h sant Maloù. Abad e oa en Enez-Vreizh e manati sant Brendan (Llancarvan), lec'h ma oa bet desavet sant Maloù.

- Er VII<sup>vet</sup> kantved, **sant Gurwal**, eskob Ghent (Belgia), Breizhad.

- En Iwerzhon, er V<sup>vet</sup> kantved, **santez Coca**, abadez Cill Choca en eskobiezh Cill Dara. Bez' e vefe c'hoar sant Kevin hag hanter c'hoar santez Athracha.

- En Iwerzhon, war-dro 550, **sant Yarlad**, abad Clúain Fois hag eskob Tuam, diskibl sant Benan, kelenner sant Brendan.

- En enez Von, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Eigrad**, abad diskibl sant Ildud.

- War-dro 1010, **sant Kolman**, eskob en enezeg Erc'h e gwalarn Bro-Skos.

